

# Gwir Vretoned

KANAOUEN EVIT AR GOUELIOU BREZONEK

DISKAN: *Var dôn « Sezis Gwengamp » pe « Sao Breiz-Izel »*

KAN: *Var eun ton nevez*

## DISKAN

Marziale



Gwir Vre - to - ned, tud a ga - lon, var zao!

Da ga - na gloar da Vreiz hor bro, Ha da ziou -

all ten - zor he bu - ga - le Ar iez, ar peoc'h, al

li - ber - te Var zao! Var zao! hag am-part a -

tao. Ka-romp Breiz I - zel he - tek ar ma - ro.

## KAN



O va Breiz, gant da dou - riou bru - det,

Da vor glaz ha da ve - ne - ziou,

Da vrug ruz ha da lann a - laou-ret,

Te zo koant dreist an holl bro - iou!

Gwir Vretoned, tud a galon, var-zoa !  
Da gana gloar da Vreiz hor bro,  
Ha da ziuall tenzor he bugale :  
Ar yez, ar peoc'h, al liberte ;

Var-zao ! var-zao !  
Hag, ampart atao,  
Karomp Breiz-Izel betek ar maro !

} bis

I

O va Breiz, gant da douriou brudet,  
Da vor glaz ha da veneziou,  
Da vrug ruz, ha da lann alaouret,  
Te zo koant dreist an oll broiou !

II

Ne zeuz ket, 'vel etouez hor c'herreg  
A dud vad, seder ha nerzus ;  
Ne zeuz ket, 'vel en hor brezoneg  
Soniou drant, gwerziou dudius.

III

Hon tud koz, tud leal ha santel,  
Start egiz hon dero kalet  
A ouezaz miret da Vreiz-Izel  
He brud-vad, he nerz, he gened.

IV

Bretoned, savomp hor c'halonou,  
Ha touomp e talc'himp atao,  
Da vale var roudou hon tadou  
Keit ha ma zañ ar bed en dro !

P. TRÉOURÉ.